

14

Mestr an douar hag an envou
 Eo Jezus-Krist, ar guir Aoutrou,
 Miret a rimp start en hor c'hreiz
 E lezennou gant eur guir feiz.

15

Ni garo Doue dreist peb tra
 Ni garo ive hon nesa,
 Evel breudeur ha c'hoarezed
 Ato n'hi jomo unanet.

16

Mari, hor Mam hag hon Itron,
 Goulennet deomp an nerz-kalon
 Da vont bepred var ho roudou
 Ma kerzimp oll tre d'an envou.

17

Torrit galloud an drouk-speret
 A enep deomp-ni kounaret
 Ha diouallit evel guez'hal
 Parissionis Landudal.

18


Guir vugale d'hon Tadou koz,
 N'hi a fell deomp er Baradoz
 Eun deiz ganto beza bodet
 En dro dehoc'hui, hor Mam garet.

J. R. Mignonarm.

IMPRIMATUR :

Quimper, le 30 Juin 1927.

P. MESSAGER, Vic. gén.



8N1-2-073

Barrez Landudal

KANTIK


En enor d'an ITRON VARIA DEL POPULO



Hon tadou koz o deuz guez'hal, Hed an am-zer



e Lan-du-dal Dehoc'hui Ma-ri, dor an En-vou, Be pred



goest - let o c'ha - lo - nou.

DISKAN



I - tron Va - ri - a Po - pu - lo, Hed hor bu -



ez ni ho meu - lo ; Be - zit hor Mam, hor Pa -



tro - nez, Sel - lit ouz - omp gant tru - ga - rez.

2

Pa goueze varn'o ar poaniou,
 Ar c'hlenvejou, ar goualeuriou,
 Holl e savent o daoulagad
 'Trezeg enhoc'h, Mam douc ha mad.

3

Eun aoutrou braz ha pinvidic
 A oa o c'hom e Quistignic,
 Eun deiz a zo bet prizoniet
 Er broiou pell, gant an Turket.

4

Deuz e galon 'kreiz e anken
 E 'sav ractal eur guir beden,
 Ha d'he vam vad deuz an Envou
 E ra da glevet e glemmou.

5

« Itron Vara Populo,
 « Va diframmet deuz ar maro,
 « Ha me zavo, Guerc'hez santel,
 « Ebars ma bro, dehoc'h eur chapel. »

6

Eun iliz kaër en deuz savet
 'Vit ma vije anavezet
 Ho karantez krenv ha fidel
 E pep korn deuz bro Breiz-Izel.

7

An Iliz-se, daoust d'e c'hosni,
 'Zô brao ho koant dreist pep hini,
 Kouls da rouanez eo guisket
 Gant e zaë mein dantelezet.

8

Dre zek prenest, ar sklerijen
 A dars enhi puill ha laouen
 A rent skeduz e zeir aoter,
 Tri drôn dispar great d'hor Zalver.

9

An amzer goz 'zo tremenet,
 Mez d'ho kalloud n'euz fin ebet :
 Itron Varia Populo,
 Dehoc'hui ni vo fidel ato.

10

An amzer 'deu d'uzza peb tra
 Ar veïn, an dir ar c'haleta ;
 Ne drec'ho ket, o Mam garet,
 Ar feiz hor beuz dehoc'hui touet.

11

C'hui deu da glask hor c'halonou
 Dehoc'h e vezint, Mam a c'hraçou :
 Eur galon hor bezo ebken
 Ha dehoc'h e vezo da viken.

12

Var an douar-ma z'euz tud fall
 Oc'h ober brezel disleal
 D'hor c'hredennou muia karet,
 N'eo ket e Breiz e vent kavet.

13

N'eo ket e Breiz, e Landudal
 E tal skeuden hor Mam leal
 E teuffe den da lavaret :
 « N'euz na Doue, na Mestr ebet. »